

GWERS

War sujet ar c'horf hac en ene.

Speret Santel, me a c'houlen
Ho sicour hac ho sclerijen,
Ewit gallout gwelloc'h a ze
Diskleria d'ec'h eur wers newe.

Hoguen hema eo ma sujet,
Buez an den paour war ar bed ;
Ar maro, hac ar varn goude :
H'en gravet don en ho ene.

Me garje beza heb calon,
Balamour d'an tentation ;
Rac, calon an den zo frajil
Hac an diaoul a zo subtil.

Ho buez na bada quet pell ;
N'en deo med mogued pe awel :
War bouez eun neuden vreïn ema,
A dor pa songer nebeuta.

Na neus quet affer a desto,
Ewit hon lakat d'ar maro ;
Ha, gousecoude a vo daouçen
Hac a vo testo hon enep.

Goude gourc'hemeno Doue,
An heol al loar vo test neuze :
Brassa hini en assurance,
A vezo c'hoas hon c'housciance.

En ifern deomp prest a speret,
Da welet poan ar re danwet,
Tourmantet euzus nos ha de,
Abalamour d'ho gwal vue.

Aman, m'ar fell deomp war ar bed,
Ni reïo hon evurusdet ;
Carout ha servichi Doue,
Ha renonc, crenn d'ar vanite.

Biscoas David, a dra certain,
Na Sant Per, nac ar Vadalen,
Na deus bet lec'h da deplori,
Ma breudeur evel a mep-ni.

Ar re-ze a voa pec'herien ;
Mez ni, sivoas ! zo muntreien ;
A mep laket Salver ar bed
Er groas dre maliç hon pec'het.

Greomp wel ar Gananéen,
Criomp, gwelomp, war bouez hon penn ;
Criomp Jesus ha heuillomp-an,
Ha goulennomp pardon outan.

Na gommeltomp james pec'het
Pa vefomp gant Doue gwelet ;
Hon Æl mad a scrivo neuse
Hon hano woar leovr ar vue.

Evel an Autro Sant Frances
Sonjomp er pemp gouli alies,
A pedomp a greiz hon c'halon
Jesus en croas ar bassion.

Diwal ta, te teod malhurus,
Gant da speret quen orgouillus,
Rac te a laca ar glac'har
En env ac e war an douar.

An hini a chilaou tēodo fall
Laquean ive quen goas all,
Rac distrei a ra e speret
Diwarlez an Doue assuret.

Malheur d'an hini a gouëo
Ebars en puns an abimo,
Pini so hanvet an ifern,
Rac precipitet vo evit biquen.

Goude ma nevo cals a boan
O tēvi bars en creis an tan
Eus pen vo privet'wit james,
Gwelet Doue hac ar Werc'hes.

Retorn-ta, pec'her malhurus !
Retorn da gavet da Jesus ;
Retorn da gavet da Zalver,
Er Sacramant deux an anter.

Me bromet vi dizamaret
Deus a lasço an drouc speret ;
Mar zo gwir guen en ez calon,
Vo accordet did ar pardon.

Rac biquen ene na antre,
Certeu. en barados Doue,
Hep beza quer pur ha quer net,
Wel en heur ma wa bedeet.

It d'ar garnel, ha goulennet
Doare vaniteo ar bed :
Respontet vezo dec'h, hep mar,
A zint chomet bars an douar.

Oll mempro tud varo ar bed
En douar zo boed d'ar preonved ;
Ho esquern a chom er garnel,
Quen a deu Doue d'ho guervel.

Ma breudeur ha ma c'hoarezet,
Me ho suppli oll, hac ho ped,
Da gravi-don en ho speret
A wers pehini meus canet.

Mar peus c'hoant da glewet brema
Piou a neus rimet ar wers-ma :
Eun den divalo a speret
En Lanhuon domiciliet.

ANGONI JESUS

ER JARDIN OLIVET

VAR AN TON : GANT AR GOAD SCUILL VA ZALVER.

Ebars a Jardin Olivet
Antreomp varlec'h Jesus
Contemplomb Redemptor ar bed
En e angoni poanius
E galon beuzet er glac'har
E zaoulagad en daëlou
Eo plegueit betec an douar
Dindan poez or pec'hejou.

Pebeuz burzud a garantez
Cetu mestr bras an envou
En em samet dre drugarez
A lousdoni or c'hrimou
Pebeuz sam a boez varnezan
Ar pec'hejou tremenet
Ar re a gommeter brema
Ac ar re vo commettet.

Adalec ar pec'het quenta
Euz hou tad Adam guechall
Betez ar pec'het diveza
Eus an divez a den fal
Var e guein ho guelan berniet
Pebeuz sam a bec'hejou
Goudeze bezit estonet
Mar scuill quement a zaëlou.

Pec'her te a c'h eus er guisquet
Euz a bornez da grimou
En dro dezan ec'h eus scoulmet
Eur c'houris a bec'hejou
Penaus ec'h eus dishenvelet
Un Doue santel a pur
Cetu ar frouez milliguet
Eus da galon dinatur.

En eur stad quer vil, quen euzus
E dad en deus heug outhan
E zaoulagad carantezus
A zistro divarnezan
Diaguent e vuya caret
A complezanç e galon
Jesus brema zo an objet
Eus e valediction.

Evit ma vije assuret
Eus an arret solonel
En deus douguet en e enep
E tigac dezan en cœl
En e zorn eur c'halir c'hoero
Leun eus a ly or c'hrimou
Ac en e voelet ar maro
Frouez trist or pec'hejou.

O velet ne voa mui moyen
Da douch e dad coleret
E teu da gaout e zisquibien
Allas ! ac ho c'haf cousquet
Dilezet eo en abandon
Gant an dud a gant e dad
A nep tu gonsolation
Doue pebeuz calonad.

Souden dioutho e pella
Ac a commanç a nevez
Da hirvoudi a da voela
Gant ar spont ac an encrez
Arauc au tourmancho garo
So evithan preparet
Circonstanç ebet anezo
Ne all echap d'e speret.

En amzer eus e bassion
E souffro, a dra certain
Poaniou bras, cals confusion
Mæs an eil goude eben.
Ama ho zant oll assamibles
Evel bleizi arraget !
En eur mor a dristidiguez
E galon a zo beuzet

En em velet a ra guerezet
Gant Judas a treitour fall :
Gant Per memeuz e zeo nac'het,
Dilezet gant ar re all
Deja e sant a scourgezou
O tispenn e gorf santel
Ac ous ar groaz e vemprou
Staguet gant tachou cruel.

Er guel a guer bras tourmanchou
Ec'h antren en agoni
Mæs ar pez a gresq e boaniou
E zeo hon ingrateri
Pa vel quement a soufrançon
Coelet evit ar pec'her
Ar goad eus e oll vemprou
Var an douar a ziver.

Deut da zestum ar beradou
Eus ar goad precius
A ziret, evel pizenniou
Eus a gorf divin Jesus
O consideri e anqueu
Ac e c'hlac'har diremet,
Dre zaëlou eur guir binigen
Desquit goalc'hi ho pec'het.

AMEN.